

KANTIK ZANT IVY

TON : { *Kantik ar Besketerien :*
Hon c'hanouen a zo dister.

Parousianiz Logivy,
Kasomp a greiz hon c'halon
Hon feden trezek zant Ivy,
Hon zad hag hon zant Patron :

DISKAN

*O zant Ivy, eus lein an Env,
Diwallet ho pugale ;
Miret en o c'hreiz ar Fe grenv,
Ha kennerzet o ine,
Ewit ma chomfoint bepret
Kristenien, gwir Vretoned (diou vech)*

Ho mam Nona oa eur zantez,
En he c'hreiz stard ar greden,
Gret nevo ar vugale gez
Eveltoc'h mammo kristen !

C'houi 'pad ho yaouankiz ken fur,
Bezef skouer an dud yaouank,
Bezef o sklerijen, o stur
'Wit 'goefoint ket 'barz ar fank !

Doue ho tibabaz gwechall,
Ewit prezeg e hano ;
Ganec'h 'vije pladet ar fall.
Trec'het ar falz-kredenno !

En hon amzer, ar fall ive
'Zo dishualet 'n hon bro !
Eur brezel euzuz, didrue
A zo gret d'hon c'hredenno !

Stardet ar fe 'n hon c'halono,
Ha c'harzet brec'h an dud fall
Da diframan dimeus hon bro
Furnez, gizio-mad gwechall !

Pa 'oac'h arc'heskop Minivy,
En Breiz-Veur, 'lec'h oac'h ganet,
Nag a vurzud, o zant Ivy,
Dre ho peden c'houarveet !

Eun den maro resusitet,
Ineo a-vern zalwet,
Ar gweled da daou dall roet,
Ha burzudo all c'hoaz gret !

Doue a nevoa gret d'ec'h gout
An de e vijec'h marwet !
Aboe merk dimeus ho kalloud
Meur a wech 'zo bet gwelet !

Deut eta, o zant gallouduz,
Da zikour ho pugale,
Ha goulennet digant Jezuz
Ma vo dinam o ine !

Ma vo bepred karet Doue,
Ma vo ar gerent divlam,
Ma vo kristen ar vugale,
Kristen an tad hag ar vam !

Diwallet parouz Logivy ;
Eus a bep drouk he miret ;
Hag eun de, en Env, zant Ivy,
Gret d'imp bean unanet !

Dirag ho relego zantel
Gant fians ni a bedo
Pa deufomp beteg ho chapel
Dro d'ei beio hon zado

Y.-M. G.

Imprimatur : Brioci die 11^e julii 1908.

Y.-M. LE PENNEC,
Vicaire général.

